

## AR PEUL / L'ESTACA

Ar ganaouenn gatalan *L'Estaca* (ar pezh a dalv « ar peul » e brezhoneg) zo bet savet gant ar c'haner [Lluís Llach](#) e 1968.

D'ar mare-se e oa bro-Spagn dindan diktatouriezh ar jeneral Franco.

Ar ganaouenn-mañ zo evel ur galv d'en em unaniñ a-benn stourm asambles ouzh ar mac'homerezh ha tizhout ar frankiz. E penn kentañ e oa un arouez eus ar stourm enep ar mac'homerezh frankist, met bremañ eo deuet da vezañ arouez ar stourmoù evit ar frankiz, dre vras.

Brudet bras eo ar ganaouenn-mañ e bro-Gatalonia bremañ. Deuet eo da vezañ ul lod eus folklor ar bobl. Ur blanedenn etrevroadel he deus bet ivez. Kanet eo bet gant ur mor a ganerien, ha troet eo bet e ouzhpenn 50 yezh, en o zouez ar galleg, an okitaneg, an euskareg, an alamaneg, ar c'horseg, ar poloneg, an esperanteg, ha kement 'zo.

E Breizh eo bet kanet gant ar c'haner Thierry Gahinet. Lakaet eo bet e brezhoneg evitañ gant Mona ar Beg.



1. Tad kozh Sizet din a lâre  
Beure mat ouzh ar gloued  
Ha ni o c'hortoz an avel  
Ha gwelout ar c'harr 'tremen  
Sizet ne welit ket ar peul  
E-lech 'm'omp staget hon daou  
Biken c'hellimp 'n em zistagañ  
Biken ne c'hellimp kerzhout

**Ma sachomp start ez ay d'an traon  
Ha ne bado ket mui pell c'hoazh  
Ha sur e kouezho kouezho kouezho  
Rak gwall vreinet eo dija  
C'hwi ma sachit start dre- aman  
Me ma sachan start dre du-se  
Ha sur e kouezho kouezho kouezho  
Neuze c'hellimp 'em zieubin**

2. Siwazh, Sizet, se 'ra pell'zo  
Ha va daouarn 'zo krignet  
Va nerzh-kalon o tec'hout kuit  
Hag eñ 'zo kreñvoc'h-kreñvañ  
Gwall vreinet eo bremañ ar peul  
Met ken poanius eo, tad-kozh !  
Ma santan va nerzh o tec'hout  
Lâromp 'ta en-dro ho kan

3. Un deiz e tavas an den kozh  
Trec'het gant un avel fall  
Den ne oar bremañ pelec'h emañ  
Ha me chomet ma unan  
Bugale all a dremen c'hoazh  
Holl a-gevret dirazon  
O kanañ e ganaouennoù  
Ur c'han en doa desket din